

An arzourien o talañ ouzh o flanedenn

🎵 Sinfonienn n^{um} 5 et Ut leiañ (1807), gant Ludwig Van Beethoven (1770-1827)



Ur sonaozour alaman eo Beethoven. Eus fin ar prantad klasel eo e sonerezh, ha santout a reer enni perzhioù romantel dija. Oberennoù Beethoven zo brudet-tre, ha sonet e vezont ingal c'hoazh.

Ar 5^{vet} sinfonienn, anvet ivez « sinfonienn an tonkad », zo unan eus e oberennoù brudetañ. Soñjerien an XIX^{vet} kantved o deus lakaet anezhi e-touez oberennoù heverkañ ar prantad.



Ouzh peseurt prantad eus Istor ar sonerezh eo stag an oberenn-mañ ?

Krennamzer	Azginivelezh	Barok	Klasel	Romantel	Modern	A-vremañ
450	1450	1600	1750	1820	1900	1950

Stag eo oberennoù Beethoven ouzh _____

Pa vez sonet an hevelep kerzenn gant ar binviji e vez lavaret e sonont **kedun**.

Pa vez sonet an hevelep dastalm ganto e vez lavaret e sonont **heñveldastalm** (=heñvelritm)

♪ Penaos e krog ar bomm ?

♪ Peseurt temz-spered zo gant an oberenn-mañ ?

Barzhoniel – Sioulaüs – Aerel – Galloudus – Sioul – Mennet – Dastalmek – Dous – Kerzennel – Asur

♪ Displeg perak, gant abegoù a glevet er sonerezh :

Tempo :

Nerzhennoù :

Niver a vinviji :

Temz-spered Sinfonienn an tonkad zo _____, _____,
 _____, _____ ha _____ peogwir

Listenna perzhioù pennañ ur sinfonienn :

Skriv un termenadur : Petra eo ur sinfonienn ?

E peseurt kenarroud eo bet savet an oberenn-mañ ?

En ur gaozeal eus tem ar sinfonienn-mañ e skrivas Anton Schindler, unan eus buhezskridourien gentañ Beethoven :

« An tonkad eo a zo o skeiñ ouzh dor e di »



E 1802, en ul lizher skrivet d’e zaou vreur, un diell istorel e anv « testamant Heiligenstadt » (anv ar gêr e oa o vevañ enni d’ar mare-se), e skriv Beethoven :

« En ur stad reuzeudik emañ abaoe 6 vloaz, gwashaet gant medisined sot. Kredet em eus e c’hellfe gwellaat va yec’hed, met ret eo din a-benn ar fin asantiñ d’un droug a bado bloavezhioù, ha n’eo ket sur e vije posubl e bareañ zoken... »

Da dregont vloaz e verz Beethoven emañ o vont da vezañ bouzar... E mod-se e sko an tonkad ouzh dor e di.



Geriaoueg

Kedun : à l’unisson (binviji pe vouezhioù)

A-unvouezh = à l’unisson (mouezhioù nemetken)

🎵 Sinfonienn n^{mm} 8 e Ut leiañ (1943), gant Dmitri Chostakovitch (1906-1975)



Ur sonaozer rusian eus ar prantad soviedel eo Chostakovitch. E 1941 eo ret dezhañ tec’hout kuit diouzh kêr Leningrad gant e familh a-bezh, abalamour d’ar bombezadegoù alaman.

Daou vloaz goude e skriv e 8^{vet} sinfonienn. Dediet eo d’ur rener laz-seniñ rusian, Mravinski. Pennoberenn sinfonek ar sonaozour eo an oberenn-mañ.

Ouzh peseurt prantad eus Istor ar sonerezh eo stag an oberenn-mañ ?

Krennamzer	Azginivelezh	Barok	Klasel	Romantel	Modern	A-vremañ
450	1450	1600	1750	1820	1900	1950

♪ Peseurt temz-spered zo gant an oberenn-mañ ?

Hiraezhus – Skañv – Ankenius – Arreidik – Hunvreus – Feuls – Laouen – Ponner – Seder – Prederiek

♪ Displeg perak, gant abegoù a glev ez sonerezh :

Petra a verzer e-barzh an eiladur ? _____

Penaos e son ar binviji ? _____

E peseurt mod e son ar c’houevrelloù ? _____

Penaos e echu ar bomm ? _____

Ur **vougell** zo ur mekanik evit dousaat nerzh ar son. Gellout a ra ivez cheñch sonliv ar benveg, a zeu da vezañ sklentoc'h (muioc'h « metalek ») evit ar c'houevrelloù.

Ur **pouezad** zo un notenn a vez pouezet warni : lakaet e vez a-wel-kaer dre un nerzhenn greñvoc'h eget ar re all.

E peseurt kenarroud eo bet savet an oberenn-mañ ?

Diwar-benn e sinfonienn nⁿⁿ 8 en doa skrivet Chostakovitch : « Fellet en deus din adkrouiñ santadurioù diabarzh mabden, bouzaret gant morzhol ramzel ar brezel. »

« Gouzañv a ran evit an holl re a zo jahinet, a zo kaset d'ar marv, a zo o vervel gant an naon, pe e vijent skoet gant Hitler pe gant Staline. E kañv emañ, da viken, abalamour d'an holl reuzidi. »

Ur garm o sevel a-enep ar brezel hag an hollveliouriezh (=totalitarism) eo an oberenn-mañ ; pe e vije hini bro-Alamagn pe e vije hini an USSR.



Geriaoueg


Arreidik : a glever ennañ traoù adsonet meur a wezh (= répétitif)

Nerzh ar son = *intensité* (≠nerzhenn = *nuance*)

Sklent : « metalek »

Mougell* = sourdine

Pouezad = accent dynamique



Raktres sonerel : Un jour au mauvais endroit, Calogero



Calogero Maurici, brudet dindan an anv Calogero, zo ur c'haner, sonaozour ha soner gall, a-orin eus bro-Sikilia. Ganet eo e 1971 e Échirolles, e bannlev Grenoble. Ar ganaouenn *Un jour au mauvais endroit* a oa en e 6^{vet} albom : *Les feux d'artifice*, embannet e 2014. En eñvor Kevin ha Sofiane eo bet skrivet, daou zen yaouank skoet betek ar marv gant ur vandennad eus ar site e-kichen, Villeneuve, e Grenoble. Ur ganaouenn engouestlet enep ar feulster er c'harterioù eo.

Raktres sonerel : Envole-moi, gant Jean-Jacques Goldman

Oberour, sonaozour ha kaner eo Jean-Jacques Goldman. Ganet e oa bet e Frañs e 1951. Brudet-kenañ e oa er bloavezhioù 80. Kenderc'hel a ra da sonaozañ evit arzourien all, niverus. *Envole-moi* a oa e-barzh 3^{de} albom an arzour, e anv *Positif* (1984). Er ganaouenn-mañ e tispleg n'eo ket ret d'an dud a vev er siteoù plegañ d'o zonkad. Gras d'ar skol ha d'ar sevenadur, e c'hell pep den yaouank kemer stur e blanedenn, evit sevel ur vuhez gwelloc'h dezhañ e-unan, « a-daolioù levrioù ».





ENVOLE-MOI

Jean-Jacques Goldman

Refrain



En-vo-le moi, En-vo-le moi, En-vo-le moi — loin de cette



fa - ta - li - té qui colle à ma peau — En-vo - le moi, En-vo - le



moi — Rem-plis ma tête d'autres ho - ri - zons d'aut - res mots — En-vo-le moi —

Introduction instrumentale

Couplet 1

Minuit se lève
En haut des tours
Les voix se taisent et tout devient aveugle et sourd.
La nuit camoufle
Pour quelques heures
La zone sale et les épaves et la laideur.

J'ai pas choisi
De naître ici
Entre l'ignorance et la violence et l'ennui.
J'm'en sortirai,
J'me le promets
Et s'il le faut, j'emploierai des moyens légaux.

Refrain

Couplet 2

Pas de question,
Ni rébellion
Règles du jeu fixées mais les dés sont pipés.
L'hiver est glace,
L'été est feu,
Ici, y'a jamais de saison pour être mieux.

J'ai pas choisi
De vivre ici
Entre la soumission, la peur ou l'abandon.
J'm'en sortirai,
Je te le jure,
A coup de livres, je franchirai tous ces murs.

Refrain

Pont instrumental

Refrain

Coda

Me laisse pas là,
Emmène-moi,
Envole-moi
Croiser d'autres yeux qui ne se résignent pas.
Envole-moi, tire-moi de là
Montre-moi ces autres vies que je ne sais pas.
Envole-moi....
Envole-moi,
Envole-moi,
Envole-moi,
Regarde moi bien, je ne leur ressemble pas.
Me laisse pas là, envole-moi,
Avec ou sans toi, je n'finirai pas comme ça.
Envole-moi....